

331 / e 29
*my n'pochi deus 0

CHANSON

AR

SEIZ SQUIENT NATUREL

Voar eun ton agreabl.

Apollon, Mercurius, Venus ha Jupiter,
C'hui a delc'h var an douar an amitie sincer,
Hac a ra d'an dud yaouanq en em garet parfet,
Prestet din hoc'h assistanç, me o ped, eur momet.

Sperejo celestiel, astro ar firmamant,
Me a deu d'oc'h implori gant eur galon ardant,
Da rei din an talanchou a bere m'eus ezon
D'espliquan ar propojo aretet em c'halon.

Abostolet evurus, hanvet an Ebestel,
C'hui a ro instruction d'ar gristenien fidel,
Pa'noc'h choaset gant Doue 'vit preseg ar lesen,
Chilaouet he grouadur, exaucet va feden.

Rouanez an amitie, princes ar yaouanquis,
Moïses ha Jeremi, chefo deus an Ilis,
Ha c'hui, carante dener, zourcen an deliço,
Deus a gomzo eloquant rourlisset ma gueno.

Ne c'houlenan quet antren 'bars en theologi,
Na mont da guemer affer ous an dud a studi;
Ar belec, an arc'hescop hac an den a blaen
Ne garfen quet 'no enor divanquan an asen.

Breman c'houlenan avis an autoriteo,
'Vit n'ho devo quet a lec'h da reproch ma c'homzo,
Hag evit cavet repos da furchal ma speret,
Ec'h an d'antren en ilis lec'h on bet badeet.

Patronez ar barous-man, ma c'harante divin,
Prosternet on dirazoc'h var beno va daoulin,
Juntet gani ma daou zorn, digor ma daoulagad,
O sellet trezeg an env da c'houlen ar mennad.

Guir vab an Tad Eternel, ma Salver admirabl,
Me so deut d'oc'h adori beteg ho tabernacl;
Disquennet, mar plij guenes'h, eur zel a drugare
Var an hini disteran dimeus ho pugale.

Me a zo eun den yaouanq zavand ha dizourci,
'Boue an oad a daouzec vloa on poursu ma studi,
Am eus c'hoant da discleria ma bue malurus,
Mar manquan dre ignorans, a c'houlenan excus.

Me ho suppli, Genitor, mestr ar scrivagnerien,
Croguet breman bars em dorn, conduit ma fluen,
Ha c'hui, tad a sclerigen, poset var ma speret
'Vit ma scrivia pen da ben ma buez dremenet.

Mar 'mije bet eun talent 'vel en defoa sant Paul,
Hag eur voes quen agreabl evêl eur rossignol,
Da riman eur zon nevez me laqje ma speret,
En enor d'am mestres coant, ma guir vuan caret.

Mes me a c'houlen faveur quent vit commanç ganti,
Rouanez an oll æle bag hini ar Messi,
Ar seiz squient naturel hag ar seiz planeden,
Da rei din o ajistans da boursu ma reglen.

Me 'm eus choaset 'vit mestres fleuren ar yaouanquis,
Brillantoc'h evit ar ros hag 'vid ar fourdelis,
Agreaploc'h da barlant 'vid an æle memes;
Gredan quet a man he far 'bars ar rouantelez.

Quentan 'moa bet an enor da velet ma mestres
A oa en pardon Sant-Min, gant he c'hamaradez;
O vale hag o pourmen evit he fassetans,
Eno e defoa piquet ma c'halon gant eul lanç.

D'ar c'houlis se me oa yaouanq, o commans studian,
O poursu ma avantur mesq ar re zavantan;
Ma c'horf a vije er scol, mes allas! ma speret,
Gant ar bouquet florissant a vije occupet.

Demeus an oll scolerien, me oa, en assurans
Ar c'heutan, ha goude ze ne oant quet 'vit avans,
Ha me ho soujal, eun de, monet beteg he zi,
Gant eur galon languissant da velet anezi.

Me ho salud, merc'h yaouanq, objet ma c'harante,
Me zo deut d'ho cavet an devez a hirie
'Vit laquat eun tam amzer, mar be d'ho fantasi,
Da gontan dec'h ma doare ha clevet ho hini.

Den yaouanq, leun a furnes, me ho salud ive,
'Vel m'en defoa gret goejal ar sænt hac an æle,
Pere ie voar ho daoulin dirag ar Messias
Var lein mene Calver pa oa tougen he groas.

Ober ret din eun enor hag a zo agreabl,
Gant he comzo familier hac ho polonte vad ;
C'hui eo an hini a garan muan, en assurans,
Nemet da Zoue hepquen na rofen preferans.

Sellet Roue an envo en eur gador voen,
Var lein Mene Sinai, ho scrivan he lezen,
Dre behini e tifen ous he oll vugale
Donet d'en em draissan an eil hag eguile.

Me lar dec'h en guirione aman, ma servijer,
Oc'h eus goneet ma c'halon dre gomzo saluter ;
Ha pa gaffen mab eur prinç, evel na gavin quet,
Ne desiran nemedoc'h vit bean ma fried.

Ho propojo ravissant a blij din, ma mestres,
A rejouiss ma c'halon, ma n'oc'h quet traitoures,
C'houlenan netra dianac'h, quen evit ho quitât,
Evit ar veaj quantan, 'met bean 'n ho c'raç vad.

Arsa 'ta, ma servijer, couls eo dimp finissan,
Me a den da laret d'ac'h quen a vo ar c'hentan ;
Ous ho pidi da retorn hep dale d'am guelec,
Ma graç mad vo guenac'h partout lec'h ma c'hefet.

'Vit an eil guech, a gredan, me o vont da vale,
Gant eur speret quen contant hag hini an æle,
Da velet ma mestres coant, rouanes ma c'halon,
Hi enn deus ma remlisset a gonsolation.

Bonjour ha joa, ma mestres, rouanes ar fleurio,
A guement so bet biscoas plantet ebars er vro,
Brillantoc'h evit an heol, scleroc'h evit al loar,
Puissantan merc'h yaouanq a zo oar an douar.

Me a garje bean bet eloquans Ciceron,
Pe autramant ar furnes en devoa Salomon ;
Eur gueno gret en arc'hant hag eun teod alaouret,
Da barlant en ho presans evel ma veritet.

Pa 'zoc'h deut beteg aman dre garante barfet,
Me a rent d'ac'h ar salud gant enor ha respet ;
'Mije gouvet ar feçon hag an tu da barlant,
A vije ma brassan joa plijout d'ho santimant.

Mes me so eur plac'h yaouanq 'neus speret dister,
N'en on quet bet studiet 'veldoc'h, ma servijer ;
C'hui a voar scrivan ha len ha me n'hen ouzon quet,
N'allan quet coms eveld'hoc'h, rac se ma excuset.

Ma mestres, c'houi so furoc'h evit Salomon ;
Ma vije permetet d'in digor dec'h ma c'halon,
c'houi 'n ije guelec enni gravet an amitié,
Hini am eus evidoc'h gant guir humilite.

Ma queret a vemp on daou unisset assemble
Evel ma oa sant Joseph hag on Mamm ar Verc'hes.
Mar-g-allan ho possedi eun de voar an douar,
Me a vezo quen joaüs 'vel an æle er gloar.

Me a so eur femelen dister a galite,
N'on quet ingal 'n ho quever en mado, en ligne ;
Mes mar-g-eo predestinet gant Doue eternal,
A vemp hon daou unisset, ne c'houlenan quet voel.

C'houi eo fleuren ar merc'hed a guemen so 'r c'hanton,
Chilaouet, mar plij guenac'h, me o ped a galon,
Moes an hini disteran dens ho servijerien,
A c'houlen eur mouchouer pe eun dabatieren.

Evit merq a amitié, ma servijer fidel,
Ez an da glasq an alc'hoec da dierr 'n armel ;
Hag a vije ma c'halon ho pije goulennet,
Ma vije possubl en rei moa quet ho refuset.

Tostaet aman, me ho ped, breman ma servijer ;
Cetu aman var an dol pevarzec mouchouer,
Ha peder dabatieren olifiant zolaouret ;
A c'hoas a so evidoc'h, hag ouspen, ma queret.

Me ielo breman d'ar guer gant eur galon contant,
Pa meus gaelet, ma mestres, ho carante ardant,
Ha ma partajet gadin lod deus hoc'h amitié,
Me a respeto anoc'h en durant ma bue.

Quen vo 'ta, cloarec yaouanq, ha ma brassa mignon,
Hoc'h aviso eloquant a ravis ma c'halon ;
Deus a guement den yaouanq 'n eus ma darempredet,
N'em eus caret nemedoc'h boe m'oc'h deut d'am guelec.

Ma mestres so 'r plac'h yaouanq hag e deus blev melen
Ha daoulagad quen ardant evel div stereden ;
Hannes en deus ar pouar, gant he selo mignon,
Da rei d'he muan caret ar recreation.

Salut doc'h, ma mestres coant, gant honor ha respet,
Me so deut beteg ho ti gant eur galon parfet,
Evel ma c'he gouejal ar profet Daniel
Bete dor ar barados da barlant ous an æl.

Dre gommandamant Doue evit goulen ar c'hraç
Da vevan en he repos ebars eun ermitaj.
Mes, allas ! me so eun den a zo bas a speret,
N'on quet capabl da barlant evel ar profedet.

Me ho ped, ma servijer, cesset ho compliment,
Ho tiscourio admirabl hag ho comzo charmant ;
Rac pa sonjan em speret er pes em eus clevet,
Pa neverd oc'h ajistanç me 'm moa disesperet.

Me a lar dec'h, ma mestres, leun a gonfusion,
C'houi 'moa laquet porcheres var doul dor ma c'halon,
Hac ouspen se an alc'houe var ma oll secrejo,
Ne garan hini 'merdoc'h a guemen so er vro.

N'oufac'h biquen, ma mignon, me a lar dec'h aman,
Caroud anon, a dra zur, muoc'h vit n'ho caran ;
Couscoude gant ma c'herent me a so difennet,
Dre ma eo bet ar goel deod o preseq 'n hoc'h enep.

Quelo trist hag effroyabl, grevus, direzon,
Te a blant eur c'hleve noas 'bars en creis ma c'halon ;
Eur vatimant am oa gret hag a zo dispennet ;
Birviquen var an douar ne repos ma speret !

O majeste infinis, ma Doue, ma C'hrouer,
Diganeb a c'houlennan ar c'hraç particulier !
An ners hag ar puissanç rojac'h d'an intanvez
Da distrujan gant he dorn roue Holophernes.

C'hoas a c'houlennan ouспен, quis eun den a verit,
Oll dalancho ar profed hag ar roue David,
'Vel m'en defoa gret goejal, quent disquen d'ar blenen,
An empereur Bonapart hag he offiserien.

M'a mije bet ar pouvoir hac ive ar puissanc
Evel 'n defoa sant Louis, pa oa roue en Franç,
D'exilan ar goal deodo deuz ar rouantelez,
E mije gret anter deus ma zilvidiguez.

Lennet ar scritur santel, me ho ped, ma mestres,
Hag a caffet rapportet, var levr ar furnez :
An neb a gret goal deodo, zo diavis ha foll,
N'e man quet var ann douar an hini bij d'an oll.

Malurus eo an hini so var an douar,
Mar deu dean nep feçon da goean 'no fouar ;
Ha, siouas ! quasi an oll, abred pe divezat,
En peb amzer eo stignet ar pecho miserab.

Ar pab en he gathedral, ar roue var he dron,
An avocat 'ne studi, ar beleg a sarmon,
Hag ar barner aseet quichen he dribunal,
So sujet d'ar goal deodo quencouls 'vel ar re all.

Breman gredan parfet ar pez a meus lennet
En eul levr ancien gret gant ar brofedet,
Eo quen difficil bevan divlam var an douar
'Vel mont da fons ar mor bras a return var ar bar.

Pa dei messenger Doue da draouien Josaphat,
Da separi ar re fall deus o vesq ar re vad,
Vo gulet ar goel deodo dirac an assemble
O vont da dan an infern 'vid eun eternite.

Evit derc'hel ar sermant a moa gret, ma mestres,
Divezan 'm oam bet 'n enor da parlant assemblies,
Ez on deut d'ho saludi gant guir fidelite,
Mes ne c'houlennan netra enep d'ho polonte.

Arretet ho propejo breman, ma c'hamarad,
Lampat a ra ma c'halon, birvi a ra ma goad,
Hag evit approuvi d'ec'h m'amitie 'n oc'h andret,
Ma queret ez int ganec'h el lec'h me tizirfet.

Gret reflexion var se, me ho ped, ma mestres,
Ma 'm be ho casset guenin en guis eun esclaves,
Ha donnet d'oc'h eureuji hep conge ho ligne :
Se a ve reprochabl din en durant ma bue.

Mes confortet ho calon, marteze gant amzer
A dremeno ho fulor ha terri o c'holer ;
Hag a veomp unisset gant ho c'honsentamant.
He c'halon oa quen mantret quen n'alle quet parlant !

Maleur 'vit an den yaouanq ne lezer anean
Da dimezi p'en deus c'hoant d'an hini blij dean !
Distrempet oa an douar eno gant ho daero
Quen a boullade an dour da gargan ho boto !

Me a deu d'ho supplian, tud yaouanq ma c'hontre
D'unissan ho c'halonno assemblies gant hon re ;
Me 'n efoa cun ha glahar o quitat ma mestres,
Queit ma via var an douar n'he ancoain james.

Mes Doue a lavar dimp ebars ar scritur sacr :
Trohan a refet ho torn ha tenna ho lagad ;
Guelloc'h eo mont gant enn dorn d'ar joaio evurus,
Evit n'en deo mont gant daou d'ar flammou malurus.

He zad a lavaras d'in : setu aman 'l lizer
Pehini 'm eus bet recevet digant eur messenger,
Hag em eus commission da rei anean d'ec'h,
Laquet-an en ho codel ha quasset-an guenec'h.

Sclerigen an oll astro, te so hanvet al loar,
Disquen ebars em c'halon ha disec'h ma glac'har,
Mar permet ma daoulagad arreti ma daero
Da rapporti eur guentel enep ar goel deodo.

Te 'n efoa roet avis, teod brutal ha funest,
D'hon tad ha d'hon man quenta er barados terrest,
Da dibri demeus ar freuz difennet gant Doue :
Te so quiriec d'hon miser ha d'hon oll baourante.

Bars en prison Pharaon te en defoa plantet
Joseph, ar santellan den deus ar patriarchet,
Pa oa bet faos accuset gant pried Putiphar ;
'Bœ ma eo crouet ar bed e c'houid var an douar.

Te ataq an dud yaouanq memes var ho c'honor,
Gant eur voues quen eclattant a ia beteg ar mor,
A deu da femel diante un tensor excellent,
Preciussoc'h 'vit an aour hag evit an arc hant.

Abalamour d'he ligne ec'h espergni Judas,
Hag avanç 'bars en histoar betec Herodias,
Pini gonsellas he merc'h, dre eun avis treitour,
Da c'houlennan var eun assiet pen sant Ian Vadezour.

Lar din, teod miliguet, ma n'e nouid quet contant
Bean guerzet Mab Doue ha dibennet eur sant ;
Pa c'houid en pad an amzer o clasq dont da laquad
Ar mein be var an douar da ruian gand ar goad.

Ne bad pelloc'h ma chalon da brezeg varnean,
Pardon ha misericord a c'houlennan 'vitan,
M'en defo cun ha glac'har dimeus he bec'hejo
Ha m'an em gonvertisso bete fin he zeio.

P'antreis em c'habinet gant desolation
En sell da gavet eun dra a gonsolation ;
A c'his da len al lizer am bœa bet diant he zad,
Pa digoris anean, m'en defoa calonat.

Ma c'halon so glac'haret, ma Doue, pa sonjan
Bet on ve'et ma mestres 'vid ar voech divezan ;
Roët eo din ma chonje scrivet var baper goen,
Ma c'houitanq en general d'he dilezel a gren.

Me oa tri de ha taer noz hep dibri nag evan,
Na quen nebeut hep repos : na reut nemet goëlan,
Dre ma renquen separi, heb bean meritet,
Deus fidelan merc'h yaouanq anavan var ar bed.

An drived de a scrivas qelo d'he c'hamarad,
Ha me res dezi respont divar lizer he zad :
Pronocet oe an arret enep d'ho servijer,
C'houi iel breman d'ar gouent ha me chomo er guer.

Pa oan bars ma studi o lenn ma levrio,
Ma welet qasi manquet, beuet gant an daëro,
E renquis ho dilezel ha mont da bazeal :
Ha me quemer ma fusuil'vit mont dach asseal.

Arri'bars en creis ar c'hoat me oa fatig bras,
Ha me da guemer repos eno var ar yeot glas,
Hag evel eur Madalen commañç da deplori ;
Ne oa med Doue hepgen capabl d'am c'honsoli.

En creis ma brassan glac'har o sonjal em mestres,
Qasi'vel dre eur miracl a velis eun heies
En em stringas d'am daoulin evit ma saludi,
Inspiret a beurs Doue da dont d'am c'honsoli.

Me ho ped, galant yaouanq, arretet ho taëro
Ha laqet ho confians en Crouer an envo :
Doue a neus ar pouar da gonsoli an oll ;
Da neb a fio ennan na'n ei james da goll,

C'houi a zo var an douar 'bars en displijadur.
Noc'h eus defot a netra mar quereit bean fur,
Ha me a so vevan ebars ar foreso,
Hag a gemer plijadur da usan ma deio.

Eno e colis memoar deus ma mestres fidel,
Ha credi n'oamp get choaset gant Doue eternal
'Vit bean var an douar assembles unisset :
Graç dimp da vean eu de enn pales an Drindet.

Neuse retornis d'ar guer'vel pa'm ije nijet,
Toman re ma goad ouzin, ne santen get qerset ;
Ma speret a oa qen scanv, ma c'halon qen joaüs
Evel ma c'heo bars an env an æle evurus.

Mar boe goejall ma c'halon carguet a disesper,
Bremant me zo qen ezet evel eun ec'houeder,
Hini ia beteg an env ha retorn d'an douar ;
Adieu laran d'an tourmant, achu eo ma glac'har.

Madelez oll-buissant Roue ann oll æle,
Me rent dac'h presentamant graçou a drugare,
P'oc'h eus roet din ar c'hras, Roue ar firmamant,
Da finissan ma chanson joaüs triumphant.

Homan so eur son neve rimet ha composet
Gant eur scrivagner yaouanq dimeus a Lanrodec,
So ganet ebars er bloa mil eis cant hag ugent,
De diaroc guel ar Verç'hes a ve'bars en Avant.

Ha 'vid esplican he noad d'an oll dud ignorant
Tri mis ha pevar ugent en tu all pa daou c'hant ;
Ebars en canton Plougat eo ganet ha maguet,
Hag e hano scrivet mad so GILLES MORDELET.

Mar'm eus drouc-laret netra gant ma fragilite,
C'houlennan escus ous an dud ha pardon ous Doue,
Hag ouспен a tesiran da guement he c'hlevo
Ar boneur da jouissan deus a c'hloar an envo.

(Propriété.)

